

AR BUGUEL FUR 1

DA DRI BLOAZ.

Ar Goulennou a eure ountàn an
Impalaer CONSTANTIN, hac ar
Respontchou a eure dezàn.

*Laquet e brezonec a nevez gant nobl
ha discret M^e. G. DUBOISHARDY,
Bêleg; eilvet edition, cresget ha
corriget a nevez gant A. LÉDAN.*



E Montroulez, eus a Impr. LÉDAN.



PIOU VOA AR BUGUEL FUR.

AR Buguel Fur-mâ, pehini n'en devoa nemet tri bloaz, a lavaret a voa disqennet eus a lignes an Impalaer Constantin; le-geat e voe da guenta etre daouarn au Arc'hescop, goude e voe casset d'ar Patriarch a Jerusalem, pehini en roas da un Duc fur meurbet evit desqi e oll noblanç. Pa er guelet, ne lavaret eus anezàn nemet : *Cetu amàn AR BUGUEL FUR.* Goulennet e voe ountâ da guenta eus a belec'h e voa deut er bed-mâ, hac e respontas : demeus va Zad ha va Mam; mes Doue eo en de-veus crouet va ene..

Bezit attantif da selaou e respontehou all, ha tachit ma vezo an oll bugale qen fur hac én. Se a requetàn a greis calon.



AR GOULENNOU

A EURE AN IMPALAER

D'AR BUGUEL FUR.

An Impalaer.

PENNAUS eo grêt an Envou ?

Ar Buguel.

En eur form rond, evel ar parfeta
demeus an oll formou.

An Impalaer.

Petra eure Doue da guenta ?

Ar Buguel.

An Envou hac an Douar, ha' certen
sc'lerigen; da c'hortos formi an Eol.

An Impalaer.

Penaus ec'h eller compren tri Ferson
 on un Doue hep mui qen ?

Ar Buguel.

Dre an Eol, e pehini e qever pêvar
 dra : ar sustanç, an essanç, ar sclêrigen
 hac ar ronder, pere ne ouffet da zispartia
 an eil diouc'h eguile ; hac ouspen se,
 qement a so a brouv e zeus un Doue.

An Impalaer.

Perac e credes-te e zeus un Doue, pa
 n'er gueles qet ?

Ar Buguel.

Cetu aont ur velin-avel : gouzout a rêr e
 zeo an avel en laqa da drei, ne veler qet an
 avel, gouscoude e zoar certen e zeus avel.

An Impalaer.

Petra eo ar c'henta comz a zortias eus
 a c'hencu Doue ?

Ar Buguel.

Ur guer pe gant hini e voe grêt an
 Envou hac an Douar. Ar guer-mâ eo :
 Bezet grêt an oll.

An Impalaer.

Ha pell e voe Doue o croui ar bed-mâ ?

Ar Buguel

Ur moment hepquen; gouscoude Moyses
 a lavar penaus d'ar Sul e crouas an Æles;
 d'al Lun ec'h eure ar Firmamant, da la-
 varet eo, an Eol, al Loar hac ar Stered, d'ar
 Meurs, ar Môr, an Douar ha qement tra
 so enno; d'ar Merc'her, al Lapousset; d'ar
 Yaou, ar Guez hac al Louzaou; d'ar Gue-
 ner e formas an Den; d'ar Sadorn e re-
 posas hac e venigas qement en devoa grêt.

An Impalaer.

Petra eo esperanç ar Varc'hadourien ?

Ar Buguel.

Nebeut a dra, rac qement a acquisitont

dre dromplerez , a ya da netra.

An Impalaer.

Petra lavarit-hu eus al Labourerien?

Ar Buguel.

An darnvuia a vezo salvet, rac poan
bras o deus, ha meur a reont an oll.

An Impalaer.

Petra lavarit-hu eus ar Vugale?

Ar Buguel.

Ar re a varvo dindan an oad a dri bloaz,
hac int badezet, a vezo salvet.

An Impalaer.

Dre belec'h ec'h antreer en Ilis?

Ar Buguel.

Dre ar Vadiziant.

An Impalaer.

Dre belec'h e sortier eus an Ilis?

7
Ar Buguel.

Dre ar pec'het.

An Impalaer.

Ha scrifet eo e zeo maro Jesus-Christ
evit ar re vad hac ar re drouc?

Ar Buguel.

Da guenta e zeo maro evit ar Judevien,
pere a voa e dud hervez e Vam, ha goude
evit ar bed oll.

An Impalaer.

E pet fêçon ec'h eller beza salvet?

Ar Buguel.

Principalamant e seiz : da guenta, dre
ar Vadiziant; an eil, dre ar Merzerenti;
an drede, de ar Gôvession hac an Absol-
ven; ar bêvare, dre daelou ha Contrition;
ar bempet, dre Aluzen; ar c'houec'hvet,
dre Induljançou; ar seizvet, oc'h ober
Œuvrou a drugarez.

An Impalaer.

Da betra e servich ar Gôvession?

Ar Buguel.

Capabl eo da ober hor silvidiguez,
gant na zistroimp mui da bec'hi.

An Impalaer.

Pez seurt poan o devezo ar re a ro
arc'hant evit caout benefiçon injust?

Ar Buguel.

Qen daonet e vezint ha Simon ar sorcer.

An Impalaer.

Pez seurt poan o devezo ar vugale a
varvo hep Badiziant?

Ar Buguel.

Privet e vezint eus ar c'hraç da velet
Doue; gouscoude n'o devezo poan chet,
rac heza e vezint en ênvou, hac eurussoc'h
e vezint eguet eurussa den so var ar bed.

An Impalaer.

Ha pec'het eo dimezi da ur gares pe
da ur gommer?

Ar Buguel.

El Lezen ancien e voa permelet, me-
mes commandet; mes bremàn e zeo dif-
fennet gant an Ilis, anes dispanç.

An Impalaer.

Pa zeo qementse diffennet gant an Ilis,
p'evit tra an Tadou ancien a zemeze d'o
c'herent?

Ar Buguel.

Dre ordrenanç Doue er grent, evit mi-
ret n'en em leqjent etoues an heretiçet.

An Impalaer.

Petra lavarit-hu cus an duchentil?

Ar Buguel.

Ne lavaràn na drouc na mat.

An Impalaer.

Pelec'h e voe crouet ar Vreg?

Ar Buguel.

Er Barados Terrestr, eus a gostez Adam.

An Impalaer.

P'evit tra e voe-hi tennet eus ar gostezen?

Ar Buguel.

Evit na vije na mestrez, na matez, mes camarades hepken.

An Impalaer.

Ar re o devez er bed-mañ qement a zeziront, hac eurus int-ii?

Ar Buguel.

Salocras, rac an dud-se n'en dint get assuret mad eus o zilvidiguez.

An Impalaer.

Peseurt pec'het eo an Orgouill?

Ar Buguel.

Pec'het an diaoul, pehini a felvezas
dezàu pignat qen huel ha Doue.

An Impalaer.

Hac an ene a greg gant ar c'horf?

Ar Buguel.

Salocras, mes e vertuziou a ell cresqi.

An Impalaer.

Hac an den en devez un ené rêsonabl
hac én a ell beza ganet diou vech?

Ar Buguel.

Ia, da guenta e ve ganet evel den, ha
goude, pa ve badezet, e ve ganet evel
Christen.

An Impalaer.

Petra eo ar c'hruella tra so er bed-mañ
d'ar paour ha d'ar pinvidic?

Ar Buguel.

Ar maro, pehini na bardon da zen.

An Impalaer.

Petra eo an den?

Ar Buguel.

Ar parfeta eus an oll anevalet crouet en imach Doue.

An Impalaer.

Petra eo ar Vreg?

Ar Buguel.

An hini a so crouet gant Doue evit dere'hel compagnunez d'an den.

An Impalaer.

Pe da heur e têbras Adam an tam aval a voa bet difennet ountàn?

Ar Buguel.

Da c'houlou deiz, ha da nao heur e voc teulet ermes eus ar Barados Terrestr.

An Impalaer.

Petra eo guella tra so er bed?

Ar Buguel.

An teod.

An Impalaer.

Petra eo goassa tra so er bed?

Ar Buguel.

An teod.

An Impalaer.

Penaus ec'h ell an teod caout diou galite gen control etrezo?

Ar Buguel.

Dre ma zeo an teod liam ar vuez civil, ha ma zeo dreizàn en em acquitter eur ar c'henta demeus an oll deveriou, pehini eo da veuli Doue. — Beza e zeo ivez ar sourcen eus a vil maleur, ha dreist oll demeus ar mallozou na leusger, siouas, nemet re alies, memes a enep Doue.

An Impalaer.

Demeus a betra ne lavar james an den : aoualc'h a meus?

Ar Buguel.

Demeus a vadou.

An Impalaer.

Peseurt pec'hejou ne vez pardonet nac er bed-màn nac er bed all ?

Ar Buguel.

Ar pec'hejou a enep ar Speret-Santel.

An Impalaer.

Petra eo an huella hac ar goassa tra so er bed-màn ?

Ar Buguel.

An teod hac ar gomz.

An Impalaer.

En pet-fêçon e varv an den ?

Ar Buguel.

En diou fêçon : da guenta ar c'horf a varv dre glénvejou pe dre accidantchou , hac an ene dre ar pec'het.

An Impalaer.

Pet sort langach so er bed?

Ar Buguel.

Daouzec ha tri-uguent.

An Impalaer.

Pet sort serpant so er bed-màn?

Ar Buguel.

Beza e zeus pêvarzec.

An Impalaer.

Piou a roas o hano d'an oll anevalet?

Ar Buguel.

Hon Tad genta Adam.

An Impalaer.

Petra eo disterra tra so er bed?

Ar Buguel.

Corf an den dispartiet diouc'h an Ene.

An Impalaer.

Petra eo scànva tra so er bed?

Ar Buguel.

Speret an den.

An Impalaer.

Petra eo prima tra so er bed ?

Ar Buguel.

Sonjeson an den, rac en ur moment
ec'h ell en em dransporti dre oll.

An Impalaer.

Lavar din pelec'h emma Doue, ha me
royo did un aval.

Ar Buguel.

Lavarit din pelec'h ne ma qet, ha me
royo dec'h diou heren.

An Impalaer.

Petra eo an Evou ?

Ar Buguel.

Un ouvrach eus a oll-buissanc Doue,
digomprenabl da sqiant an den.

An Impalaer.

Petra a souten an douar?

Ar Buguel.

Ar môr bras a so en dro dezàn.

An Impalaer.

Petra a souten ar môr?

Ar Buguel.

Doue, dre e oll buissanç.

An Impalaer.

Petra eo a souten an Avel hac ar Feiz
etouez ar bayanet?

Ar Buguel.

Doue hac ar Miraclou.

An Impalaer.

Petra eo a deu da anflammi hon ene
eus a garantez Doue?

Ar Buguel.

Ar Speret-Santel, dre e inspirationou.

An Impalaer.

E pez brô ne ra james glao ?

Ar Buguel.

En Egypt, hervez an Doctoret.

An Impalaer.

Piou a savas ar c'henta Ilis da Zoue ?

Ar Buguel.

Ar fur Salomon, en Jerusalem.

An Impalaer.

Piou eo an hini a yunas tri dervez ha
teir nôsvez hep guelet nac eol, na loar,
nac an ên, nac an douar ?

Ar Buguel.

Ar Profet Jonas e corf ar balen.

An Impalaer.

Pe oad en devoa Noë pa gommeças
ober e Arc'h ?

Ar Buguel.

Pemp cant bloaz.

An Impalaer.

Pegueit e voe oc'h en ober ?

Ar Buguel.

Cant bloaz.

An Impalaer.

Pegueit e voe Noë hac e dud en Arc'h ?

Ar Buguel.

Deg mis pe vardro.

An Impalaer.

Pegueit en devoa-én a het, a dreus, hac a hueldet ?

Ar Buguel.

Cant-anter-cant goulet a het, trêgont a lepandet, ha cant-pempzeg a hueldet.

An Impalaer.

Pelec'h e m'ân an Arc'h-se brem'ân ?

Ar Buguel.

Var lein ur menez huel, er sav eol, er broving a Armeni.

An Impalaer.

Piou eo ar c'henta a blant as ar vinien ?

Ar Buguel.

Hon Tad Noë.

An Impalaer.

Piou a eure batissa ar guenta Qær er bed-màn ?

Ar Buguel.

Nembrot hac e vugale a eure Babylon, pchini eo an ancienna.

An Impalaer.

Piou a c'houlennas ar c'haera presant a ouffet james da c'houlen ?

Ar Buguel.

Joseph d'Arimathi, pa c'houlennas Corf

hon Zalver Jesus-Christ evit en enterri.

An Impalaer.

P'evit tra e yuner aliessoc'h d'ar guener eguet d'an deziou all?

Ar Buguel.

Evit eiz rêson : 1. abalamour ma voe d'ar guener e voe formet an den ; 2. d'ar guener e voe badezet Jesus-Christ gant S. Yan ; 3. d'ar guener e lazas David ar geant Goliath ; 4. d'ar guener en em incarnas Doue e corf ar Verc'hes ; 5. d'ar guener e voe lapidet S. Stephan ; 6. d'ar guener e voe dibennet S. Yan-Badezour ; 7. d'ar guener e voe crucifiet hon Zalver ; 8. d'ar guener e tle Jesus-Christ disquen da varn ar bed-màn e traounien Josaphat.

An Impalaer.

E pet fêçon en em daon an den?

Ar Buguel.

E peder : 1. o neglija ober ar pezh e zeo

oblijet da ober; 2. o pec'hi hep mez ebet; 3. en defot ober pinigen; 4. en defot pardon ha restitui.

An Impalaer.

Petra eo a blich ar muia d'hon Zalver heniguet Jesus-Christ?

Ar Buguel.

Tri dra : 1. ober pinigen; 2. ober an aluzen; 3. en em absteni a bec'het.

An Impalaer.

Petra eo ar brassa plijadur en deveus an den er bed-màn?

Ar Buguel.

Oc'h ober vad d'an oll.

An Impalaer.

Pet mab ha pet merc'h en devoa hon Tad Adam?

Ar Buguel.

Trêgont mab ha trêgont merc'h.

An Impalaer.

Piou eo an hini a voe ganet qent eguet e dad, anjandret qent eguet e vam, a lazars ar palevars eus ar bed, a lamnias e guerc'hdet digant e vam-gôs?

Ar Buguel.

Caïn e voa ennes, rac Adam voa e dad; Eva a voe crouet ha nonpas ganet; laza a eure e vreur Abel, ha ne voa nemet pevar den er bed; an douar a voa guerc'h, pehini a voa e vam-gôs, hac e voe en en labouras da guenta.

An Impalaer.

Piou eo ar c'henta a antreas er Barados?

Ar Buguel.

Hon Zalver Jesus-Christ, deiz an Ascension, ha goude, an Tadou ancien.

An Impalaer.

Pehini voe brava Eured a voe biscoas?

Ar Buguel.

Eured Cana e Galile, rac Jesus-Christ
hac ar Verc'hes a asistas personnelamant.

An Impalaer.

Piou eo ar re ne varvint james bete fin
ar bed?

Ar Buguel.

Enoch hac Elias, pere a dle combatti an
Antechrist.

An Impalaer.

Perac e laqer ur c'hoq var un tour?

Ar Buguel.

Eleal, ma ve laqet ur yar, pa dosfe, e
torfe he vi en eur guez.

An Impalaer.

Petra eo ar môr?

Ar Buguel.

Un hent dangerus bras, ha meurbot
dies da zivina.

An Impalaer.

Petra eo ar maro ?

Ar Buguel.

An disparti eus ar c'horf dioc'h an ene.

An Impalaer.

Piou eo an hini so maro diou vech ?

Ar Buguel.

Qement so maro goude beza bet ressus-
citet gant Doue hac ar Sent, evel S. Lazar
ha re-all.

An Impalaer.

Eus a betra eo formet an den ?

Ar Buguel.

A zouar e voe grêt ar c'horf, hac an
ene so deut eus an êvou.

An Impalaer.

Hac an diaoul eo a gass an dud d'an
ifern ?

Ar Buguel.

Salocras, ar pec'het eo, a zefot pinigen.

An Impalaer.

Hac arretet eo pegueit e tle peb den beva?

Ar Buguel.

Den ne voar an heur-se nemet Doue.

An Impalaer.

En piou e credit-hu?

Ar Buguel.

Credi a ràn un Doue oll-galloudec,
an Tad, ar Mab, ar Speret-Santel, tri
Ferson en un Doue hepquen.

An Impalaer.

Ha c'houi a gred e zeo en em incarnet
Jesus-Christ e corf ar Verches, hac e
sortias Doue ha den ac'hane?

Ar Buguel.

Ia, e gredi a ràn, ha credi a ràn ivez

en devez anduret trous ha naon ha calz
 a boanniou evit hor prena eus an ifern;
 credi a ràn ives e pignas en Envou d'ar
 Yaou-Basq, e tigassas ar Speret-Santel
 deiz ar Pantecost, e teui da varn an dud e
 fin ar bed, e roi ar Barados d'an dud a vezo
 maro e stat vad, ha d'ar re-all an ifern.

An Impalaer.

Perac e vouguer diouc'h-tu an tan en
 ur chiminal, en eur stoufa mad an traon
 hac an nec'h?

Ar Buguel.

Abalamour n'eo get aoüalc'h d'arc'heu-
 neut anflamet caout ear var e dro, ret eo
 c'hoas e vez libr an éar-se. Pa vez ur chi-
 minal stoufet er guis-se, an tan a voug.

An Impalaer.

Perac al loar, o veza biannoc'h eguet
 ur stereden, a seblant deomp brassoc'h?

Ar Buguel.

Abalamour al loar, o veza tostoc'h

deomp, en em bresant d'hon daoulagad
 dindan ur vent digorroc'h; ar fêçon e
 pehini en em bresant d'hor mam-lagad a
 so eta brassoc'h eguet hini ar stered.

An Impalaer.

Perac e veler ar stered e creiz de-
 meus a fonç ur punç?

Ar Buguel.

Abalamour effeet ar stered a so crénvoc'h
 eguet sclerder an eol; rac sezennou ar
 stered a guez a eon var an daoulagad,
 hep beza bet fêplêt dre nep sclêrigen;
 sezennou an eol, er c'hontrol, o veza
 leusget a gostez, na scò al lagad nemet
 goude beza bet fêplêt calz gant ar sclerder
 en em oper var bord diabars ar punç.

An Impalaer.

Perac eo tom an dillad mezer er gouàn?

Ar Buguel.

Abalamour an dillad-se, ne dint get

mad da denna an domder; dalc'ha a reont,
dre - se , tomder ar c'horf, hac ec'h
ampech anezàn da sortial.

An Impalaer.

Perac, pa denner tan gant un diren e
saill ellyennouigou bian an dan?

Ar Buguel.

Abalamour dre ma scòer buan an diren
ous ar men tòn, pehini a so guell galet,
en ein distag tamouigou dir, pere a so
tommet da rus gant an toliou c'hoecq.

An Impalaer.

Perac e zeo dangerus en eni refugia
dindan ur vezen epad an arneu?

Ar Buguel.

Abalamour ar güez o veza terminet en
poenten, a ra effet un discouruner; tenna
reont eta dezo ar matier a form ar gurun,
hac ec'h occasionont alies un tarz var an
dud imprudent pere a ya da glasq un abri
dindan o deillou.

An Impalaer.

Perac ne zeus ezom da gaout nep aoun
demeus ar gurun, pa zoar ebars an dour?

Ar Buguel.

Abalamour ar matier a form ar gurun
en em lez cundui buan bras gant an dour,
pehini ne ra nemet effleuri an traou gle-
hyet. En effet, an den savant Franklin
en e experiançou var ar gurun, a fou-
eltre, gant machinou electric, ur ras
sec'h, pehini a varve diouc'h tu, epad
ma voa ur ras goloet a zour, ha soumetet
d'ar memes preuven, a zortie yac'h pesq.

An Impalaer.

Pelec'h edo Doue abars ma voa crouet
ar bed?

Ar Buguel.

Ennàn e-unan, hac en em suffise dezàn
e-unan.



Gourc'hemennou Doue.

1. **U**N Doue heppen a adori,
Ha dreist peb tra oll a guiri.
2. E vean e hano ne doui qet,
Nac ivez netra all ebet.
3. Ar Suliou santel a viri,
E servich Doue, oc'h e veuli.
4. Da dad, da vam a enori,
Evit pell amzer ma vevi.
5. Dioüal na lazi den ebet
Nac a zezir nac a effët.
6. Lubric ne vezi qet ivez,
Nac a gorf nac a volontez.
7. Laerez na miret madou den,
E couzieguez ne ri bigen.
8. A enep den fals testeni,
Na gaou ebet ne liviri.
9. Na c'hoanta dre luxur pec'hi,
Nac e sonch vil n'en em lezi.
10. Na souhet madou da hentez,
Evit o c'haout dre falsentez.

Gourc'hemennou an Ilis.

1. **A**R Goueliou bers a santifi,
A Neuze peb labour a lesi.
2. Ha clêo devot a ben da ben,
Sul ha Gouel bers an oferen.
3. Ur vech er bloas da viana,
E c'ôvessai, hep nac'h netra.
4. Ha da Grouer a recevi
Da Basq, devota ma c'helli.
5. Yun a ri an Daouzec-Deiziou,
Ar C'horais hac ar Vijilou.
6. Qic, nemet da zeiz Nedelec,
Guener ha Sadorn na zebr qet.

Oréson d'an Æl-Gardien.

AL Doue, pa zoc'h deputed
Dious an azrouant d'am miret,
Grit, m'ho suppli, qen mad dever
Na ello netra em c'hever;
Grit din qer sur compagnunez,
Ma finissin mad va buez,
Ha goude se va c'hunduet
En ên da bales an Drindet.

FIN.